

# Keleier

ROAZON hag ar RETER

niv. 11 - Q.L.N. 10 - NEDELEG 1962.

# Neudeleg !

Peoù hag Levenez  
evit ar boblou.

## HETOÙ

GANT Jord ar MEE

 NEDELEG, gouel ar Mabig Jezuz, a zo iverz gouel ar c'houn. N'eus gouel all ebet o tegas ken tost d'hor c'halonoi ar gerent, ar vignoned o verran e-tal hor c'hichen pe pell diouzhimp.

Hiziv, nozvezh ar Pellgent, e pedompañ an holl Vrezhoned da Sonjal en o chenwroiz, en holl dud kenyoul ha kenene ganto, strollet en nested anvet ar Bobl Vrezhon. Sonjomp iverz er re a zo dalc'het e pell-vro, en holl gennvoiz skignet dre ar bed hag a zo lorch enno gant o anu a Vrezhon.

PROFOU evit ar re vras hag ar re vihan.

PROFOU aes da zibab, aes da reizh, aes da gas.

## LEVRIÖÙ.

goulennit  
e ti ho  
LEVRIER

## LEVRIOU

## BREZHONEK



Goulennit rollouù al levriouù nevez digant:

"BRUDAR HA SKIGNAR"

AR BREZHONEG ER SKOL ... YA, met ar brezhoneg ER GÊR da gentañ!  
Ermer an Tiegezhioù

## La Couyère.

Savet eo bet e parvez la Couyère un delwenn da Santez ANNA (hent Roazhon - Kastellbriant) - Kizellet eo bet ar skeudenn - vras man, e maen-greun, gant an Aotrou Aulnette eus Sel-de-Bretagne.

War ziarez an delwenn, ar geriouù-man : « O, Mère de la Patrie sois le salut de tes Bretons » ha dindan e brezhoneg : « SANTÉZ ANNA AR SKLAERDER, PEDIT EVIDOMP. »

Laouen e vo an ao. Brand, persooñ la Couyère, degemer ho profou. Santez Anna v'ho pennigo ! (diwar prezegenn an ao. Poisson - oferenn ar Vrezhonegenen - 28-10-62)

Ur c'houn iverz evit hor breudeur Iwerzhoniz, Kembreiz, Skosiz, Kerneviz, Manaviz, evit ar pemp milion ha tregont a Gelted skignet en holl vroioù ar Bed.

Dalc'homs song eus kefudi uhel ar Gelted, an holl Gelted, e Kenver ar sevenadur ar Gelted, an hini koshañ e kornog Europa, a zo bet brokus atav-gant e zanvez. Lennegesh kozh Iwerzhon, bro-Gembra ha Breizh, a zo mammenn builh ur sevenadurezh savet uhel, diazezet start war ar wñionez hag an eeuded.

Ouzhpenn-se, da Iwerzhoniz e tle ar bed ar vad graet ganto misionerion strewet en Europa a-bezh ha pelloù c'hoazh e pad ar Grenn-Amzer, hag iverz skouer burzhudus youl, dalchusted, Kadarned Iwerzhoniz roet dimp gant istor Iwerzhon hed-a-hed ar c'hatvedou betek hon devezhioù.

Da Gembraiz e tle ar bed ar menozioù kalonek uhel, komzou hael-meurbet o lennegesh dispar.

Da Skosiz, da Vreizhiz e tle ar verdeidi niverus, an dizoloeurion zouarou, an enbroourion disponent ha dizarboell.

Da Gerneviz e tle ar bed skouer dispar ur yezh adsavet gant youl un dornad tud.

Daoust da c'hoarvezadennou kríz hon amzer, daoust da reuzioù brassoù c'hoazh a c'hallfe diéhlannañ war ar bed, dalc'homp start d'hor pal uhel ha kenstrollomp hon holl strivadennou evit ma treuzeroù hor sevenadurezh keltiek evit ma c'hallo c'hoazh skoazellañ mabde Deoch Brezhoned en harle pell diouzh ho yro, deoch holl, bugale ar ouenn geltiek, e Kasomp, dre Roazhon-Breizh, gourc'hennenoù kalonek ar Bobl Vrezhon hag hech hetouù birvidik evit ar Peoù hag evit berzh mat hor strivadennou unanet. (Pennad bet savet evit nozvezh ar Pellgent 41)

## GEVEZE : Baleadenn gant "Smglev An Tiegezhioù".

Aozet e o abet ur valeadenn betek parnez Geveze gant tiegezhioù brezhonek ROAZHON. Plijadur 'zo bet evit an holl kerent ha bugale (15 bennak ane zho). Degemer dispor digant an aotrou Barbotin, person ar barrez ha digant Leanezed ar skol (Brezhonegerien int !)

## ROAZHON

OFERENN AR PELLGENT, gant kantikou brezhonek ha sonerezh binion ha bombard e chapel skolaj Sant Varzhin -(Kevrenn Roazhon)

OFERENN (vizek) AR VREZHONEGERIEN, e chapel Leanezed Santez Klara, straed Brizeug, d'ar Sul 30 a viz Kerzu da 10 e 30.

Bep Sadorn da 21 e.. bodadeg gant ar Vrezhonegerien (kan-koroll-choari) 30 leurenn al Lisoù.

## 30 VET DEIZ HA BLOAZ "SKOL OBER" Enor da VARCHARID!

Mont a raio un toullad Roazhoniz da Gallag, d'ar Sul 23 a viz Kerzu evit diskouez o anaoudegezh vat da VARCHARID GOURLAOUEN. Ne vefe ket an EMSAV ar pezh ez eo hep Marcharid Gourlaouen. Hi heden desket - pe addesket - brezhoneg d'an darn vrason achanomp.

HE LABOUR EVIT BREIZH A RANK BEZAN ENORET. (Kuzul ar Brezhon. 20)

## Radio Roazhon (Thourie)

Dilun 24 a viz Kerzu da 18 eur, KONTADENN NEDELEG gant Per-Jakez HELIAS.

Goulennit, goulennit adarre, goulennit atav ur RADIO E BREZHONEG E BREIZH!

Abadennoù skingomz a vez rozet gant pladennou goulenet gant ar selamerien. Skrivit 'ta evit goulenn pladennou brezhonek. Kasit holi zheroù d'an Ao. BARON, 40 straed Sant Brieg, ROAZHON.

## À BREZHONEGE BREIZH ! Bro Roazhon -

BREAL sous Montfort: War ur c'harr-samm : "Kerz Abao!"

TIEZ KENWERZH e ROAZHON: "Ti breiz" - "Ti an holl" - "Kalondero"

KARTENNOÙ NEDELEG ha BLOAVEZH MAT nevez embannet gant ti Ar Mée.

## Skolioù Brezhoneg Roazhon.

Levraougoù - Levrdiez - Rollad da vezant savet gant skoazell an holl.  
Tiez pladennou - hag all ----

Kenwerzhouriens och obert gant ar yezh

"Smglev An Tiegezhioù" a zo e bal lakaat hor yezh da vezant ur yezh, vev ha YEZH AN AMZER-DA-ZONT. Pep tiegezh o tont en "Smglev" a zo ur greizenn start hag OBERIANT a vuhez evit hor SEVENADUR.

?... GOULENN ... ? hag adsavet evo "Skol-Veur Ar Bobl" ?... peget.

Savet eo bet ar follenn geleier-mañ gant BRUDAN HA SKIGNAÑ evit mad ar Brezhoneg. Embannet e vo bep tio ma votu. War wellaat e c'hello mont gant skoazell pep hini.

"GWELLOC'H EO ENAOUIÑ UR C'HOU-LAOUENN EGET CHOM DA LENVAÑ EN DEÑVALIJENN" (Konfusius).

Kirieg evit an embanni Alan Al LOUARN - Zoleurenn al Lisoù - Roazhon

SKOAZEL a vo roet gant an du a garo evit dastum KELEIER, en sevel SKRIDOU ha TRESADENNOU, evit labourat war ar STENSILOU, evit skrivan CHOMLEC'HIOU, evit MOULAN ar follennou - h.a - h.a. Deoch da welout hag etalv ar baan ---